

YF_0092_An daou bichon yaouank

Tud yaouank a Vreizh-Izel didostit da gleved
C'hwi ive paotred yaouank na c'hwi ive merc'hed

Da selaou kanan ur zon komposet er bloaz-man
Zo graet da zaou zen yaouank evid en em zivertissan

An antretien kentan hag a oa bet etreze
Oa da bardon ar Releg e-barz en Eskopti Kerne

Eno o-deus en em rankontret hag an daou pichon yaouank
Eno o-deus en em zaludet, o gant diou galon gontan

Salu femelen charman, o rouanez ar genver
Biskoaz plac'h nemedout he-deus charmet ma spered

Meus dezir d'ho konduin nag endro d'en assemble
War jujet an dimezi ni a barlanto ive

Ar plac'h he-deus jointet he zaou zorn o selled etrezeg en
neh
Beteg aman ma doue me am-eus bevet dineh

Beteg aman ma doue o dineh me 'm-eus bevet
Me n'on ket evid ho respond dimeus ar pezh a larit

O petra 'ta minorezig nag e rege neh tah
Deuz ho amzer favorabl a gemen a laren deoc'h ?

Ma n'oh ket zantimantet da zimezin ar bloaz-man
Lakit din-me ho termen ha me hoteio enan

Lakit din-me ho termen un a vo ket hir
Vel e ma da zantiman na hervez d'ho tezir

Ar plac'hig e respontas ya zur gand ho gir grenn
Hag en tu-man de zoweg la o de neubeta termen.